

## KIS-351 – Gl. occlusion

(GE da GP – 15 05 88)

Ezhomm 'm eus a un termen, ur gedrann kentoc'h, o tougen ar sterad a gaver gant Gl.Sz. *occlusion* e kemeradur an dentouriezh, eleze "harpadur an dent traoñ ouzh an dent krec'h". Teusk a-walc'h ar Br. en dachenn-se. Lakaet er-maez *serriñ* ha *klozañ*, n'eus verb all ebet eus ar yezh voutin a c'hallfed d'e arverañ. Ur gedrann arbennik zo da gavout koulskoude, rak ouzhpenn ma kaver deveradoù diwar Gl.Sz. *occlus-* (*occlusal, malocclusion, mesiocclusion, anterocclusion*, h.a.), ez eus termenoù all a zo eus ar sterva hep bezañ dec'heriet diwar-bouez deveradoù eus *occlus-* (da skouer, Gl. *articulé dentaire*, Sz. *dental articulation*).

Soñjal a ran en ur gedrann a gaver e Kb. hag e hBr. : *cau*. Daou ziaester a spurmantan avat, na hañvalont ket bezañ skoilhus, a garfen kaout da santimant war o divoud :

1) E Kb., ha marteze e hBr., ez eus gant *cau* daou ster : "serr, goloet" ha "kleuz". Fleuriot a glask displegañ ar forc'had-se dre ar c'hemmesk etre Kt. *\*kowos* ha La. *cauus* (DGVB., p. 98).

2) E Kb. emañ diouzh un tu *cae* [o'r gwr. *\*kagh-* "amgau"], *caeaf* : *cau, caeu, caead, caeëd* [bf. o'r e. *cae*] ; ha, diouzh an tu all *cau* [ ? bnth. *cauus* neu < Clt *\*kowos*], pezh a ziskouezfe ur c'hemmesk all.

Moarvat n'omp ket endalc'het da ensammañ ar c'hemmeskoù-se ha gwell eo dimp dispartiañ Br. *kae, kaeañ* diouzh bremanekadurioù diwar hBr. *cau* gant ar ster "serr".

E berr, penaos dezneuziañ hBr. *cau* ? E'z *Teñzor* e rez *cau*∅ *kev, frau*∅ *frev*. Koulskoude, e'z lizher eus an 18 03 80, bremañ KIS-219, La-08, pp. 27-28, e kinnigez adkemer hBr. *frau*, BrW. *frèu* er stumm "*frou* [...], *fraou* (neket '*frev*' RH)". Dija e'z *Teñzor* e'z poa termet etre ar stummoù *kaou* ha *kev* ha dalc'het ar skrivadoù *kaoulonk*, h.a. Ur splot ouzhpenn vo o tegemer ar stumm *kou* pe *kaou*, e vo dispartiañ ar furm-

mañ o tont eus Kt. *kowos* "serr" diouzh ar furm all o tont eus La. *cauus*, eleze Br. *kev* "kleuz".

(GP da GE – 19 05 88)

Ret eo diforc'hañ, da gentañ, etre hBr. *cau* < La. *cauus* 'kleuz' a gaver e *caulocou* /kawloNkow/ 'listri kleuz' kentoc'h eget 'couverts, pontés' evel ma skriv FLEURIOT, DGVB 99 ; o vezañ ma reer gant La. *longa* (*nauis*) e c'haller soñjal ez eo latin ivez an elfenn gentañ, hogen ne ve tra oc'h enebañ ouzh ur gerdarzh gant *\*kou9o-* a gaver ervat e hIw. *cúa* 'kleuz' LEIA C-258, krBr. *queu* > Br. *kev* (< *\*kou9io-*), diouzh un tu ha'r */\*kagh-* ~ *\*kogh-* a roas *kae*, *kêr*, h.a. (IGEW 518). (LAMBERT, LEIA *l.m.* a lavar ez eo hBr. *caulocou* 'navires creux' 'probablement dû à une erreur de scribe' evit *\*ceu*, hogen techet eo da welet hevelep 'erreurs de scribes' e pep lec'h gant ma aesafe an traoù evitañ, ha gwell genen gwelet aman un amprestadenn diouzh al latin).

Ac'hann ne c'hell *kav* (ha neket *kaou*) bout nemet 'kleuz' ha nompas 'serr'. Evit heman e ranker ober gant ur ger all. Ne' eus enta kinnig resis erbet da ober. Gwell eget *kaouvell*, h.a., e rafen gant *serr-* gant na vije ket diaesterioù. [...] Pa sellez ouzh DGVB. 146, 440, e welez e ve tu da ober gant *ālid-*. And e ve ket diskoulm da gudenn ?

(GE – 28 05 88)

### Gl. **occlusion**

Termen arveret e peder diskiblezh eus ar vezekniezh :

I. – Er C'henawouriezh, o talvout "mont a-stok an dent traoñ ouzh an dent krec'h".

II. – El Lagadouriezh, ez eo "mouchañ ul lagad evit lakaat egile da δlabouratδ".

III. – Er Surjianerezh, "denesaat ribloù un digor naturel".

IV. – Er Goazhadouriezh, "astal an treizhañ er pervez".

## I. – Genawouriezh

Evit kemeradur ar C'henawouriezh, e'm boa kredet gounit korvo gant ur gedrann *kaou-* (hBr.Kb. *cau*), nemet en deus GP diskouezet din ez eo dic'hallus seurt diskoulm e-keñver yezhoniezh. GP a ginnig pe ober gant *serr-* pe gant *dlid-* (hBr. *dlitheetic*). Hogen, *dlid* zo gantañ er Vezekniezh un arver arbennik, war an un sterva ha Gl. *occlusion* end-eeun ; evit *serr-*, a c'hallfemp degemer da stirann, e welan un abeg evelkent d'e lezel a-gostez : degemer *serr-* da gevatal da Gl. *occlus-* zo chom e par arganteulioù hollek an daou dermen, ha gwell e vez bepred lakaat e penn kont an ergeñverenoù dibarek. Klask a rin enta priziañ derez kevazaster ar Gl. *occlusion* dre elfennañ ar c'healioù ambredet gant ar c'henawouriezh en e ergeñverenn ha da c'houde gwiriañ pe re eus ar c'healioù-se zo bezant en arganteul hollek ar ger :

Kealioù ambredet gant ar C'henawouriezh en ergeñverenn  
OCCLUSION :

- 1 | "serridigezh an div aven"
- 2 | "mont a-stok an dent traoñ ouzh an dent krec'h"
- 3 | "stankadur an tremen etrezo"

∅ Kealioù kenvezant en OCCLUSION hervez ar C'henawouriezh hag en arganteul hollek ar Gl. *occlusion* :

- 1 |
- 3 |

Mard eus ur c'hanteul Br. nes d'al luniad kealioù ambredet en OCCLUSION gant ar C'henawouriezh, muioc'h eget *serr-*, ez eo *harz-*. Rak, en e arganteul hollek emañ ar c'healioù : "e-kichen, a-stok ; astal, stankadur, skoilh", ken e tegouezhomp gant :

∅ Kealioù kenvezant en OCCLUSION hervez ar C'henawouriezh hag en arganteul hollek ar Br. *harz-* :

- 2 |
- 3 |

War-benn degas ar c'heal "daou furmadur o vont an eil war arbenn d'egile (an div aven, an div rezad dent)", e rafen gant ar rakger *ke-* hag ar bennrann a ginnigfen a ve **keharz-** (**keharzañ**, h.a.).

Er yezh henvoazel e kaver daou dermen (roet da heñvelster ma n'eo ket da heñvelfurm gant GIBR.) a zo *kefarz* (< *kev-* *harz*), *kezarz* (< *ke?*- *harz*) "barrière formée d'une grosse trique", "grosse trique qui

forme les séparations dans les étables", o klotañ a-walc'h o ster gant ar c'heal bezant e La. *claudo*, *cludo* ha dre se Gl. *occlusion*. Gwell evelkent degas an nevezc'her *keharz* eget astenn arver an termenoù henvoazel.

Setu an deveradoù a ginnigan tennañ eus **keharz-** :

Br. **keharzañ** "degas an dent traoñ a-stok ouzh an dent krec'h".

Br. **keharz** g. "lakadur a-stok an dent traoñ ouzh an dent krec'h".

Br. **keharz**, **keharzad** g. "keñver etre un pe lies dant traoñ ouzh un pe lies dant krec'h ; an doare ma kej an dent pa vez serret an div aven".

Br. **keharzel**, **keharzañ** "a-geñver gant ar c'heharzañ. Gl. **occlusal**, Sz. **morsal, occlusal**.

Br. **talbenn keharzel**, **talbenn keharzañ** "talbenn un dant a ya a-stok ouzh an dant keñverek" Gl. **face occlusale**. [Keñveriañ gant *talbenn kenvellañ* "talbenn eus un askorn o kejañ gant an askorn keñverek e-barzh ur c'henvell". Gl. *surface articulaire*.]

Br. **keharz**, **keharzvell** g. "doare ma kej ha m'emañ kenempret gorreoù an dent traoñ ha gorreoù an dent krec'h pa vez serret an div aven". Gl. **articulé dentaire**, Sz. **dental articulation, occlusion of teeth, contact of teeth**. Al. **Occlusio dentium, Schlußbißstellung**.

Br. **migeharz** g. "kenempradur ezreol an dent traoñ gant an dent krec'h". Gl.Sz. **malocclusion**. Al. **Bißanomalie, Misokklusion**.

## II. – Lagadouriezh.

Evit kemeradur al Lagadouriezh, ne gav ket din e ve dav mont da glask pelloc'h : **mouchañ** a hañval din spirout. Gl. **occlusion oculaire**. Sz. **blinded eye**.

## III. – Surjianerezh

Evit "denesaat ribloù un digor naturel", e rafen adarre gant *keharzañ*, pa gaver er verb-se an daou geal "mont (pe degas) a-stok" ha "stankañ".

E Gl. e vez a-wechoù arveret *occlusion* evit serridigezh wadek, dre grafaelañ (sl. KIS-325, La-08, pp. 288 hh.), un digor naturel. En degouezh-se e'm eus kinniget deverañ diwar Br. *dlid* (sl. amañ diaraok GP da GE – 19 05 88). En notenn usveneget eus La-08, e

kemeran *(-)dlita* da gevatal da Et. *-rrhaphie*. Sk. : *genaouzlita* "stankañ (keharzañ) faout ar genou dre e grafaelañ en holl pe e darn" ; *gweuzdlita* "krafaelañ ur weuz faoutet dre ur gloazad", h.a.

#### IV. – Koazhadouriezh

E kleñvedouriezh ar benvegad koazhañ, e reer e Gl. gant *occlusion* evel anv rumm d'an holl seurtadoù eus an astal treizhañ : ha pa chomfe sac'het endalc'had ar pervez dre benn seizi ar bouzelloù, ha pa ve stanket ar re-mañ gant ur skoilh diabarzh pe diavaez. Setu ar mellad e-barzh va danvez *Geriadur ar Vezekniezh* :

Br. **antreizh** g. **pervez**, **rouestlad** g. **pervez**, **ileüz**. Termen rumm evit hollad an darvoudoù lemm a-geñver gant un anforzh\* arc'hwelel (seizi) pe dreloc'hel (steviadur\* pe dagelladur\*) eus oaled ar pervez\*, oc'h astaliñ razh ha padus treizhadur an oulennoù hag an aezhennoù\*. Gl. **occlusion intestinale**, **iléus**.

---

\* **anforzh** "oblitération" ; **steviadur** "obstruction" ; **tagelladur** "strangulation" ; **oaled ar pervez** "lumière intestinale" ; **treizhadur an oulennoù hag an aezhennoù** "le transit des matières et des gaz".